

Rimou

Da c'houlen ha da rei plac'het da eureuji .

(262)

Houlen.

Or sus eta , Compagnunez ,
 En en retiret tout a gostez
 Erit mam bo an avantach da barlant
 Ama en o prezans en langach eloquant ;
 Ne oufen ober quellor'h tra
 Erit ober sin ar groas da g'enta .
 In nomine Patris , et Filii ,
 Eevelen e comansan ganti .
 Ma ven quelet en Bro-Saos o c'hober gement all ,
 E ve lavaret e ven un aillon pe un den fal ;
 Mes er vro-m'an ne estimer netra
 Ames ober sin ar groas da g'enta .
 Et spiritus sancti . Amen .
 Erit achui va feden .
 Debonsjour ha joa en ti-ma ,
 Ne de get a chom enna ?

(263)

Respont.

Ja , va mignon , un accion vat oc'h eus grêt ,
 Dre sin ar gras p'oc'h comanset ;
 Me ive a rai couls ha c'houi
 In nomine Patris et Filii ,
 Hag erit achui va feden ,
 Et spiritus sancti . Amen .

Houlen.

Hag e ven e piales eur roue ,
 Me ne ven get trêtet en daill-je ,
 Na zigasie pot pe lages
 D'am hentcha da vont d'e bales ;
 Mes c'houi na zigasit hini
 D'am hentcha da zont d'o ti .

Respont.

Annân eus un ozac'h c'hoi e gichen ar tãñ,
 Er boez rei eur c'hoi-mat butun dezãñ,
 Hag oc'h hentcho couls ha ricun dre ar vro-mãñ.

(264)

Goulen.

An ozac'h c'hoi-se a gafen mat
 Da gas ar zaout pe d'o c'herc'hat;
 Mes non pas da fiout ennãn
 Eur gompagnunez evel homãn.

Respont.

Lãmet oc'h eus ger soubl ho tãd,
 Ne gafet netra ennoc'h defot;
 Preparer mat ho tãcourzon,
 Ha studier ho langachou:
 Sac'hoi oc'h eus a langach great,
 Me zant ar c'hoez eus ho tillat.
 Fochit ha plantet en tu mar qerot,
 Me a zibouloudo dre ma labourot.

Goulen.

Clãvet en boa, qent dont ama,
 C'hoi a barlãntche a draou ar re vella;
 Diouzoc'h, va mignon, e c'houennãn,
 Peg'eit e voe Doue o croui ar bed-mãñ.
 Hag eur vinier a voe plantet,
 Erit pe fãson ei finiset.
 Setu arze teir g'estion
 A c'houennãn ganec'h, va mignon.

(265)

Respont.

Ignorant e ven a dra zur, va mignon,
 Ma na expligen dec'h ho teir g'estion
 Brema zouden e ber amzer.
 Me a expligo dec'h en daou c'her:
 Ar vinier a voe plantet
 Erit disgoel e voe ar bed-ma crouet,
 Ha displantet e voe adare,
 Erit disgoel e finisic.

Ha c'houec'h devez e voe Doue o croui ar bed-ma,
 Hag ar zeizvet d'e zerricha.

Choulen.

Hervez ma oc'h eus raportet,
 C'houi a zo demeus an doctoret;
 Mes, mar quir doctor, va mignon,
 E renqit doug'en ar chantillon,
 A ve var ar seoa gleiz stag'et,
 Erit ma viot dre 'r menq-se anavezet.

(266)

Respont.

M'am bije me serten gouezet
 E vijec'h deut hirie d'am quelet,
 M'em bije dec'h eur fest preparet;
 Yriou linat ha re alec
 Treid siliou ha re aringet,
 Pêvar gartier eur g'ellienen,
 Ne dorjec'h qet ho tent erit criniat an esqern.

Choulen.

Dont a ran d'en em estoni,
 Pa glêvan peg'er caer fest o proa demp da brepari;
 Mes mar qerit dont disul d'an oferm bret da Vouimeg,
 Ni a breparo dec'h ive eur banqet,
 Ni a rai dec'h ive eur tam yot silet,
 Hag a laqai ho reser da redec;
 Oc'h assistans, compagnonez,
 Me o ped da laqat evez,
 Rac eur goal barti a velan amañ,
 Mil aon ameus na gollin gantàn;
 Mar deu din col e quirionez,
 O pezo mes ivez, va c'hompagnonez.

(267)

Respont.

Mam bije me serten gouezet
 E vije ar brezel ganec'hu discleriet,
 M'em bije preparet va c'hanoliou,
 Va fistolenou ler ha va mousclejou,
 Pistolinier sec ha boulejou stoup
 Da sqei ganec'hu var ho chouq.

Goulen.

(1928)

Ni zo eur vanden dremenadi,
 O vont da Vrest da ambarqi,
 Hag on eus urz gant an Ampereur,
 Va mignon, d'o cas ganemp d'hoñ heul;
 Ha mar don deut dre Orleans,
 Ha dre bermission an ampereur a Frans:
 Hoñ urz a zo cren meurbet,
 An neb a gontesto, a vezo puniset;
 Grit e broses en eur vale,
 Da veza distrujet hep dale.

Respont.

Cren ha cren, compagnonez,
 Pa velan hirio an dromplerez,
 Pa velan ezomp gemeret
 Gant eur vandennat soudardet,
 E teuan da grena gant reñson
 Gant aon na vemp laqet oll en prizon,
 Erit dont eno da finisa hor buez;
 Mar collomp hor rouantelez.
 Gouscoude e voa deomp raportet
 E voa deomp ar peoc'h acordet;
 Var a velan ez eus trahizon,
 Combatomp oll a vir galon.

Goulen.

(317)

Eur groug lasic or boa stignet
 Eur goulmiq ven or boa atrapet,
 Mes allas! ne voa get cren,
 Hag eo echapet adare;
 E asqel a zo toret
 Achap a bel ne alle get,
 Hag on eus clêvet lavaret
 Ezeo arna eo disqennet.

Respont.

Dibot procuror en e studi
 Na ra e blede d'e fantazi,
 Gen a ve mont en oditor

Dirag e brocuroel control,
 Eno e ve laqet dindan e fri
 Evit gallout en dibouti;
 Mes c'houi pa voac'h gant an hent o tont,
 A rē ho plede hag ho cont,
 E haze ganec'h o croc,
 Mes el leal, gortos a reot.

Goulen.

Parlant a rit, va mignon qer,
 Manifiq. bras evit oc'h afer;
 Ma vec'h pignet en eur gador,
 E ve lavaret e vec'h eur predicator.
 Mes me laqais o c'herbedi,
 Ebars e Gemper en escopti,
 Evit m'o pezo eur stasion,
 Eur baros benac evit sarrnon,
 Ha ni a yelo tout d'o clēvet,
 Gant peb honor ha peb respet:
 Me a gred sur a dra serten,
 C'houi a gounvertise ar bec'herien.

(318)

Respont.

Meurbet on estonet o velet
 Neq deus qet en o toues eur bēleg;
 Mar deu da hini ac'hanoc'h fatiga,
 N'oc'h eus bēleg ebet d'oc'h asista.

Goulen.

Crena ra va daoulagad en pen,
 Pa gomzit din eus ar veleyen;
 Rac me zo couls ganen' quel eur c'haor en eur golec,
 Evel quelet en hon touez eur bēleg.

(319)

Respont.

Den yaouaneq ouy o tont er bed,
 Gout ar c'hustumou ne rān qet;
 Rac me ne meus qet studiet
 Evit goulen na rei merc'het:
 Mar deu din lavaret netra sod,
 Mar plich g'eneoc'h va excusot.

Goulen.

Evel ma on deut da dal an ti,
 Ne garen get dont d'o choqi,
 Na d'o repren, na d'o fachha;
 Rac serten an dra se ve ar goasa.
 Mes erit cavet tro da barlant,
 Ma vezo a propos va c'honplimant,
 Excuz ha pardon a c'houlennan:
 Pa blijo ganec'h, comzit breman.

(320)

Respont.

Ma na deufen get da respont an dud,
 E ve lavaret e veñ mud,
 Hag on eus sonjet ober vel,
 Sevel amañ eur zantinel,
 Sevel amañ feson un ti,
 Erit respont an dremenidi.

Goulen.

Me, va mignon, zo eun den yaouanq
 Hag a zo bas eus a sqiant;
 Ja, me a zo asur gen ignorant,
 Ne veritan get en ho prezans parlant;
 Mes mar don ignorant a dra sur,
 Neñ don get ignorant dre natur,
 Rac ma noc'h eus get anavezet va zad,
 Me rayo dec'h anavesout e vab.

Respont.

Ober a rer din cals a henor,
 Guelet eur sort compaignuneg etal va dor;
 Mes ret eo dec'h erfat, lavaret din, va mignon,
 Demeus a betra ez eus qestion.

(321)

Goulen.

Gant ezon bet sortiet,
 Demeus a dre e garet,
 Da c'houlon dezàn da eureuji,
 à rêr anezji.
 Qercouls ha me, va mignon, oc'h eus clêvet,

Tri emban sur a zo bet grêt,
 A zo bet lanset gant ar béleg,
 Ha feños, gant ar c'hras a Zoue,
 On eus sonch da gas ar bevare;
 Mar deut, va mignon, dom rebruti,
 Ni a laqais oc'h expleti,
 Hag e vefet condaonet d'an amand,
 Hag e cousto d'ec'h cals a arc'hant.

Respont.

Mac'harit Jaouen a zo hortizes,
 Zo et da Gestel pe da Vontroulez,
 Ha ma reget ganti ar ves,
 Dre ma ze gant an hent e re e fompriat,
 Oman eo ar pezh evit galoupiat.

(322)

Goulen.

Va mignon, na livirit get din a c'hevier,
 Quel e d'ec'h lavaret ho Pater,
 Rac brema zouden a biou ho fri,
 Me ameus hi quelet en ti.

Respont.

Doue en devez lavaret
 Bis[hoas] den en rouantelez an en
 Ne devez james antreet,
 Nemet gant courach en defe combatet;
 Mes c'honi, va mignon, n'o po get o plac'h,
 Na renget disput eur pennat c'hoas.

Goulen.

Glorius en o cavan meurbet,
 Va mignon qer, gent ho merc'het,
 Gousecoude ar merc'het a zo goal bejou,
 Rac spei a reont gant ho c'heillou,
 Ha pa ve toret o c'heylou,
 E c'hoariont gant o c'kinginon;
 Evidon-me a lavar cren,
 Biger en maoues na fifen.

(323)

Respont.

Na intourdisit get va feñ din, va breur,

Rac Mac'harit Jaouey a zo et da seer,
 Profeset ebars en Montroulez,
 Ebars en breuries Sant Franses.

Goulen.

Mar oc'h eus c'hoant e vemp mignonet,
 Na gomzit get din a seurezet:
 Eur seur, ma ve laqet en pris,
 Ne dalfe get he habit gris,
 Pe mar tal netra oustren,
 Ne dal get e habit ven;
 Ar reze a zo atao o vurmuri,
 O tîpen an dud hini a hini,
 Ha pa neur g'evont en eur bagat,
 Ezeont d'ey em scandalat
 Neuze ec'houzont en eur bilat
 A doliou ivin bete ar goad.

(324)

Respont.

Na ravadit get va fen din, otrones,
 Diou ar pezh a c'houlennit diganeme,
 Rac ma o pe dig'eneme tennet,
 Ar gaera dimeus va merc'het,
 Goude dinme c'houi a c'hoarse,
 Hag el leal rêzon o pefe.

Goulen.

Ne grenin na ne chenchan liou,
 Ma n'am be ac'han e zin abiou,
 Rac ar profet a lavar:
 Ez eus nao fumelen da bep mal,
 Hag e vemp ganec'h refuset,
 Ni a gavo goucoude merc'het.

Respont.

C'hoarvout a ra ganec'h evel ar merdaidi,
 A ya da noveur da zijuni,
 Ha goude e vent epad an de o laviga
 Allas! alies o clasq e renker rabata;
 Ha c'houi, va mignon, na chomit get arze d'ober brut,
 L'epit ho pezh, hag it d'o chut.

(325)

42

Goulen .

Meurbet o cavan dives,
 Miret demeus an den-ma e blac'h nevez,
 E unan e rang oza e yot hag e grampeoz,
 Caeroc'h e rang da ober c'hoas,
 Mont d'an ti-form gant e doas,
 Ha pa ha d'ar velin da oza e g'erc'h,
 Eha an oll merc'het var e lerc'h.
 foi, foi, eme sellet ar goas,
 Sac'h ar vaoues deus e scoas.
 Livirit din, va mignon qez,
 Ma vec'h en e blas, n'o fe-hu get a vez?

Respont .

Pa oac'h aru gant an hent,
 Me zanje din e voac'h eur vanden sent;
 Mes credi a ran, a dra serken,
 Ezoc'h eur vanden merc'heteryen.

(326)

Goulen .

Me a ya da zivoucha va boutou,
 Evit mont da zispenn va roujou;
 Rac evit ac'hân, var a velan,
 N'or bezo netra evit breman.

Respont .

Mar doc'h get atachet, e telfot merc'het,
 Me a lavaro dec'h pelec'h e qefet;
 Mar qefet mont da Lopreden,
 E qefot eno eur plac'h evit eur grampeozen.

Goulen .

Sac'h ar bier! ar reman ã an dud!
 Couls a re vras ha re venut;
 Evit qement ameus lavaret,
 Ne reont van evit va c'hlêvet.

Respont .

Me vel erfat e rangân plega,
 Terri va gar hep e blesa,

(327)

Ha mont d'e digas dec'h d'an or,
Da c'hout ha c'houi e resevo gant honor.

Goulen.

Me, va mignon, a zo eur scolaer,
Hag a zo bet e meur a gartier:
Er Rusi, er Chin hag er Spagn,
En Turki, en Egipt, e Rom, en Alamagn;
Ac'hane e voan deut d'ar g'er
Dre sant servest - Guiniventer;
Ha n'em boa caret den d'am fesa c'hoas,
Nemet un den a Japon, en d'oa seiz trotad fas;
Pemp trotad en e gent, seiz rasoer en e veg,
Mes cleal, va mignon, c'houi fat no'e'us int get.

(= trotad ?)

Respont.

Setu amañ eur plac'h yaouang,
Hag e deus eur speret contant,
A zo diangach a beb lec'h,
Hag a dal hirie qeit ha dec'h.
Ha ma na d'e get mat d'o cout,
Serten ec'h ellit mont en o rout.

Respont:
er veg.

(328)

Goulen.

Ne souetan get, va mignon coant,
E ve o ti qer dibourveet a blac'het yaouang,
Na zigasec'h unay deomp da velet,
Serten na vero get refusget;
Mes homan zo an daill var he beg,
Da vera et pel zo da veg:
Me vel merget var he chod clei,
En eus bet goas o proqat dei;
Qasit - hi buan var e g'is,
Gant avan na defe droug-avis.

Respont.

Clêvet oc'h eus alies parlant,
O comz demeus eur zal gaer hag eloquant:
Ja, va mignon, me ameus amañ eur zal,
Hag a zo carg'et a draou-leal;
A bep tu dre e daou gasterz

(329)

44

Neñ deus nemet olives hag olifres,
 Dindan an treid evit pare,
 Neñ deus nemet loreñt ha lore.
 Ja, ar sal-mañ a zo armet
 Demeus a gaera peder blantenn a galet,
 Unañ zo roz, un al tulipes,
 Un al zo palm hag un al cypres;
 Ha c'hoas nemeus contet dec'h netra
 Evel a gontin dec'h brema.
 E creis ar gal-mañ eus eur femelen
 Demeus ar gaera a velec'h bigen:
 He muzelloù a zo a ros bordet,
 Michans e onnes a fel deoc'h da gavet.

Goulen.

Va mignon, gout a ouzo' h erfat,
 Pa g'ever an avel e ve quentat;
 Ha c'houi pa g'efet disqarq d'o merc'het,
 Me ho ped, n'o refusit get,
 Ha c'hoas trugaregat Doue
 Pa na reomp en g'is Table
 En devoa da ravisa ar merc'het,
 An devez memes eus o heuret.

(330)

Respost.

Setu amañ eur plac'h yaouanq
 Caer evel an eol brillant;
 He diou chod a zo rus evel roz,
 Distinglet evel an deiz eus an nos:
 He sal a zo caer evel capabl
 Da lagat calon mab da drital;
 Ha ma na blich get homa dec'h
 Ne oufen petra d' ober dec'h.

Goulen.

Tromplet mat e ve ma speret,
 Pe eur banne quin a re ameus evet,
 Mar de honas ar femelen,
 Ameus grêt anezi goulen;
 Mes ar plac'h d'ar ar parze deut, (??)
 Ne deo get da veza refusit. (331)

Me zo ive un dey yaouanq,
 Hag ameus ive eur speret contant,
 Hag a zo diangach e peb lec'h,
 Hag a dal hirio qeit ha dec'h,
 A lagai va dorn en he hini,
 Hag a yel ganti da zimezi;
 A rai outi peb contrat mat,
 Evel m'euré he mam eus e zat,
 A brometo dei eno fidelite ha fe,
 En ti, er mes hag er quele;
 A zalc'ho dei mat bete mervel,
 Ne oufen qet lavaret quel.

Respont.

Arsa eta, va mignon qes,
 Pedi a rai ganec'h ar plac'h nevez;
 Mont a rai d'e digas dec'h d'an or,
 Me o ped d'e reseo gant honor.

(332-)

Goulen.

Didostaît eta, dey nevez,
 Da gregi en dorn ho mestrez,
 Evit rei dec'h an arvoenti,
 Mac'harit Yaouen a rer anezi:
 Lagit ho torn en he hini,
 Ha sonjit penos e pado
 O comanant bete ar maro.
 Na deuit qet ive d'e malbreti
 Na d'e chaseal ermes an ti
 Evel pa na anavefac'h qet anezi;
 Pe mar grit, va mignon, clêvit ur g'er:
 Lagit evez eus ar goalinier,
 Ar goalinier a zorn Doue oll-buisant,
 A buniss ar re vechant:
 Da lavaret eo, ar goalinier
 Demeus e fureur hag e goler,
 Pehini a ellomp da evita,
 O vera en gras Doue er bed-mâ.
 Pedit Jesus, roue an tron,
 Da rei dec'h e venediccion.
 Ha da asista en oc'h eured,

(301)

Evel ma c'heure quechal en eured Cama en Galilee ;
 Tachit da gundui eur vuez vad,
 Hervez Doue hag herves ho stad,
 Erit ma c'hefet gantan da repos,
 E fin ho puez d'ar barados.
 Gementse a zouhetan da g'ement so ama,
 Ha din-me va-unan da g'enta ;
 Me a ya da laqat va zoq var va fen,
 Evel a gle ober peb christen,
 Compagnuneg, gant ho permission,
 Pa meus gret va dever ha va c'homision .

~~~~~

An demezion a bell  
 Neq dint nemet tourion ha qestel .



(Vol. I, p. 262-268, 317-332 et 301.)